

KELAOUENN  
SOKIALOUR  
BREIZHEK

AL  
LANV  
40

YANN-KEL KERNALEGENN (gw. p. 32)



BEP  
DAOU  
VIZ





# DEK VLOAZ ZO

Setu dek vloaz ma tarzhe an noz war maezioù Bro-Gastellin, o lemel diganeomp Yann-Kêl Kernalegenn, Kerna, evel ma raemp anezhañ diouzh e vev, etre mignoned.

Reuz ha freuz a voe d'an ampoent. Soñj o devo dalc'het lod eus an eurvezhioù hir tremenet etre krabanoù beg-e-dog. Goullo e chomas o c'haoued avat.

Ha Kerna a zeuas da vezañ Yann-Kêl, war diweuz ar stourmerien a vorloc'he niveruzik da neuze... Derc'hel a reas nozioù Breizh da glevet tarzhe ha pulluc'h hirik amzer c'hoazh.

\*  
\* \*

Dek vloaz zo... Gant an amzer oc'h ober he zro ez eus bet c'hoarvezet meur a gemmadenn er vro ha kemend-all en emsav da heul. Ken e tapjes souezh, Yann-Kêl, mar deuje dit addont en hon touez... Hep o menegiñ amañ holl, ne vo ket ur fall evel-kent degas da soñj donedigezh ar gostezenn gleiz ouzh ar stur, duhont, e Pariz. Kalz e Breizh o devoa lakaet o holl fiziañs en darvoud hirc'hortozet-se. Lod zoken, a gerzhe dorn-ha-dorn ganto ha "Fañch Mitt" a daole deomp "Ma breudeur a Vreizh !"

Hogen, pa voe deuet ar c'hazh da razh e voe ret-mat dibikouzañ... ha gwelet "e oamp" bet touellet ur wech c'hoazh. "Paris sera toujours Paris" evel ma kan ar C'hallaoued o-unan. Krediñ a ranker n'eus nemet e Breizh e lavar div wech an Istor ar memes tra, e ken kaz ma vefe bouzar ar Vretoned moarvat...

Un nebeud gwellaennoù a zeuas evit gwir, met ken nebeut. Digraouiet e voe paotred ha merc'hed an Talbenn, Plougoñviz a welas Kaoter an Diaoul o pellaat diouzh o douaroù, un aotreegezh brezhoneg a voe diframmet gant Skol-Veur Roazon... Ha ! m'en dije gounezet "Fañch Mitt" e '74, d'ar mare ma veze gwerzhet triskelloù evel krampouezh ha ma kleved Alan Stivell er gourmarc'hadoù, pa oa giz Breizh en he bog !... Moarvat hor bije tapet diskrapañ muioc'hik a draoù, met pas kement-se a-benn ar fin, rak dizurzh-kaer a rene da neuze ha levezon '68 a oa kreñv c'hoazh, o tinac'h ar vroadelouriezh, ken e ranke tevel hor stourmerien gozh, i hag o devoa bet amzer da brenañ skiant hag a ouie petra oa bezañ touellet...

Donedigezh an tu kleiz e '81 a oa estreget gwellaennoù en he ser ; dismantr an emsav dre vras. Al ledemsav en devoa graet daoulagad milliour ouzh ar renerien nevez a ziframmas tamm-ha-tamm, o krediñ moarvat o devoa sachet an tamm ganto. Lod a yeas ken brav ha tra da c'houlenn digor er strolladoù gall, P.S. ha P.C.F.

Buan ez eas da hesk sac'hadig profoù Pariz. Ar promesaoù a chomas promesaoù, evel danvez lezenn ar Peñseg da skouer.

Ken ne chom mui bremañ nemet ar re na blegint biken, tan ar vroadelouriezh en o ene, hag un nebeud fistoulerien all o vodañ-divodañ emglevioù-tasmant...

\*  
\* \*

Setu me gwall bell diouzhit Yann-Kêl... Met nag ur sapre loudourenn a razh e tle bezañ an amzer, betek ma krign kement-se eñvor an dud. Ne oamp ket gwall niverus ouzh da gevarc'hiñ ar Sul all e bered Kerfeunteun. Gwir eo ivez ne oa ket bet graet re a charre war-dro an dekvat deiz-ha-bloaz, n'eo ket manifestiñ a felle deomp ober, ken ez eus lod hag a zo tremenet hep gouzout... evel p'o dije da ankounac'haet, sell 'ta, gast a amzer... Ur bobl ne oar ket mui eñvoriñ he stourmerien varv a zo gwall nebeut a dra war ma meno. Ha padal, na pet ne oant ket o ouelañ, devezh-hont da zouaridigezh ; pelec'h edont, ar Sul all ?

Moarvat e kav dit Yann-Kêl e sellan re ouzh revr ar billig, pa zeu kaozioù ken du all ganin. Met ken du-se n'int ket, ha kenerzh — neket frealz — a zo da gaout e-leizh o welet ar vroadelouriezh oc'h adc'hounit tachenn en emsav tamm-ha-tamm.

\*  
\* \*

Diwar an dekbloavezhiad stourm hag a zo aet e-biou e c'heller dezrannañ splann n'eus nemet ar vroadelouriezh hag ar vroadelouriezh vrezhonek hepken a c'hello kas hor pobl war hent an dasorc'h. Kement doare stourm all renet en anv pobl Breizh ne c'hell bezañ nemet touell ha gwashoc'h c'hoazh : gaou.

MARTIAL MENARD

## ECHU AR FEST

Glav a ra war Gemper  
Echu eo ar fest  
Er poullou don  
E c'heller c'hoazh klevout  
Dameuc'h an tousmac'h

Echu ar fest  
Tec'hed an douristed  
Trec'h eo bet an abadenn-veur ?  
Nann, ar glav a zo bet trec'h  
Ar glav, an douar a nac'h an estren  
Koeñvet eo hor pobl  
Kousk a ra atav Arzhur  
Ha n'eo ket deuet d'he dihuniñ

Ar fest n'ec ket kroget  
abadenn abaf hiziv